



www.editionsptitlouis.fr

3

MANER AR RU NEVEZ

Anvet gwezhall kastell Gurwant



Maner ar Ruiou Nevez pe Ru Nevez e Trec'horanteg a vez anvet ivez « Kastell Gurwant ». Un ti kozh eo zo liammet moarvat ouzh priñs breizhat an IXvet kantved, Gurwant. Er goañv 875 e voe emgann etre Gurwant ha Paskwezhen kont Gwened da gaout rouantelezh Breizh a oa bet skrapet ganto digant ar roue Salaun. An emgann etre an daou briñs breizhat a vije bet hervez kont e-kichen Trec'horanteg war un dinaou en Draoñienn hep Distro en ul lec'h anvet lanneier Gurwant. E 1514 e voe Raoul Hamon perc'henn war merouri ar Ru Nevez bet prenet gant e dad 25 bloaz a-raok. Stag eo ar maner ouzh kastellanaj Bresilien e kontelezh Moñforzh.

E 1592 e voe aloubet kastell Gurwant da vare brezel al Lig. Gwerzhet e voe dismantrou kastell Gurwant da Benjamin de L'Aage e penn kentañ ar XVIIvet kantved. Adsevel a reas ar savadur hag e voe kizellet adarmezoù e familh a-us d'ar porched da vont tre.

E 1777 e voe prenet ar maner gant Henri-Jacques François de Busnel. E vab, Henri-Marie-Annibal, a gemeras ur perzh oberiant er chouanerezh. Skoazeller e voe d'ar penn chouan « de Puisaye ». Kemer a reas perzh e emgann an Hengêr etre Plelan ha Benion, d'an 3 a viz Mae 1794.

E 1825 eo gant ar baron Aimé-Rodolphe du Taya ma voe prenet maner ar Ru Nevez, kuzulier el lez-varn galy Roazhon e oa hag ivez aozer al levr « Brocéliande, ses chevaliers et ses légendes » embannet e 1839. E 1847 e teuas un tavarnour eus Benion da vezañ perc'henn war merouri ar Ru Nevez, Jean-Louis Frinault e anv. E 1929 e voe enskrivet ar maner e renabl ouzhpenn ar monumantoù istorel. Adsavet e voe e 1977.

Ul lojeiz prevez eo ha n'eo ket digor d'an holl.

1 KASTELL KOMPER

Ar roue Salaun a vije bet o chom el lec'h-se en IXvet kantved. E istor a grog gant Raoul Gael, kamalad da Wilherm an Alouber, a gemeras perzh e emgann Hastings. Unan eus kastelloù kreñvañ Breizh-Uhel e teu da vezañ en XIIIvet kantved a-drugarez d'an toufleziou ha d'ar stankou a oa tro-dro dezhañ. Distrujet e voe e-pad brezel an hêrezh gant Beltram ar Gwesclin e 1372 a-raok bezañ savet en-dro war-dro 1375. Er XVIvet kantved e voe ar familh Rieux perc'henn warnañ ha goude-se, hini Coligny. E 1595 e voe aloubet gant an Duk Mercoeur da e'houzañv ur seziz warnañ...



2 MANER AR ROZ



Maner ar Roz zo e-kreizik kreiz ar maeziou, e-kreiz Koad mojennel Breselien, ul liorz h leun a wez zo tro-dro dezhañ. Ul lojeiz iskis eo, eus ar XVIIvet kantved, adsavet e oa bet en un doare a-feson ha dalc'het en deus hoal dudius gwezhall. Er saloñs e kaver poltred a vent vras perc'hennet kozh al lec'h.

Diouganerez e oa d'he mare hag e sache kalz tud amañ hag he spered zo c'hoazh amañ, setu ar pezh a vez lavaret...

Savet e oa bet ar maner war roz sakr Breselien war dismantrou ur c'hastell-kreñv a oa bet distrujet da vare an Dispac'h. Riboulou a yae eus ar c'hastell betek abati Pempont hag ivez betek prioldi Sant Bartelemi. Unan eus an dorioù da vont d'ar bed all eo, hini ar mojennerezh keltiek ma vev a-gevret ar gwir hag an diwir. Hiziv e tegemer tud a zeu da ziskuizhañ e-kreiz an natur en ur c'hoad gwir.

... a badas meur a viz e-pad brezelioù al Lig. E 1598 e voe lakaet da zismantrañ mogerioù kreñv Kastell Komper gant Henri IV. E 1790 e voe devet ul lodenn eus al lojeiz kreiz gant an Dispac'herien. Adsavet e voe bet gant Armand de Charrette en XIXvet kantved.

KREIZENN MOJENNEREZH AR ROUE ARZHUR

E Kastell Komper emañ sez Kreizenn Mojennerezh ar Roue Arzhur, ur gevredigezh zo he fal lakaat an dud da zizoleiñ pe da anavezout gwelloc'h mojennoù ar Roue Arzhur, re an Daol-Grenn, hag ivez ar bed keltiek hag hini ar grennamzer forzh peseurt hini vefe, a-hed ar c'hantvedoù hag evit an holl...



Geriaoueg

Bez ar ramzed :

Anv al lec'h-se a ra dave d'ar ramzed a veze talet outo gant Marc'heien an Daol-Grenn e-pad o c'hurioù. Ur c'houfr eo a oa bet savet war-dro 1500 bloaz a-raok Jezus-Krist en ur implij ar peulvanioù kemeret war ur regennad kalz koshoc'h.

Ti Ninian :

Ur c'houfr eus nevezoadvezh ar maen eo, savet war-dro 2500 bloaz a-raok Jezus-Krist.

